

Bayon (E . Job er Bayon) Pleuigner 1876 – Kolpou 1935)
En Eutru Keriolet, bet embannet e 1902. Bet adembannet e 1979.

Skrivet eo e gwenedeg. Miret eo bet e zoare skriva, tamm pe damm.

Faziou a zo e-barz ar skrid-se. Da skwer e ra gand *eh-eus* e-leh *hoh-eus*, *en-deus*, e-leh *he-deus*...

E brezoneg Gwened ema ar skrid-se. Bez' helloh impljoud ar geriadur-mañ : Guillevic – Le Goff : Geriadurig Brehoneg-Galleg, bet embannet gand Emgleo Breiz.

En Eutru Keriolet

Trajediz e teir lodenn

An dud ag an trajediz

An Eutru Keriolet

Matelin, meùel koh en Eutru Keriole

Frañsez, meùel yaouank.

Ivon, meitour en Eutru Keriolet

Pièr, mab Ivon, fillor en Eutru Keriolet

Izaak¹ ar Sorsér

Loeiz, bugel

Gwennaël, bugel

Kure Pleuigner

Bihui, den yaouank ag ar harter

Guignér, den yaouank ag ar harter

Job, den yaouank ag ar harter

en Hwéhour.

¹ **Izaak** : anad eo e oa Bayon a-eneb ar Judevien.

En eutru Kériolet

(e galleg)

KERIOLET est le grand homme de chez nous. Né à Auray il y aura bientôt 377 ans, il établit sa demeure à Kerlois et c'est là qu'il a longtemps vécu, comme un diable d'abord et ensuite comme un saint.

M. Jh. LE BAYON, qui a pris rang parmi les meilleurs poètes de la Bretagne s'est heureusement inspiré de notre histoire locale pour composer un drame très émouvant sur ce personnage.

Ce drame a été représenté une première fois à Pluvigner par la troupe PAOTRED SANT GUIGNER le dimanche 30 août 1903. Et cette année, les 7 et 15 juillet prochains, une nouvelle troupe de Pluvigner va nous procurer le plaisir d'assister une fois encore à cette représentation et d'applaudir ce chef-d'œuvre. Monsieur l'abbé J. BULEON nous faisait remarquer que le langage est élégant comme il convient à une œuvre d'art, simple comme il convient dans une œuvre populaire, souple et facile comme il convient pour la conversation – jamais, jusque là, la versification bretonne n'avait montré, dans notre dialecte, une telle souplesse unie à tant d'élégance et de simplicité.

...

Il y a quelque 350 ans ce bon Monsieur KERIOLET parlait le breton comme les paysans de chez nous. Il va ressusciter pour un instant et vous l'entendrez. Il parlera breton aussi bien qu'autrefois. Car les gars de Pluvigner tout en parlant français aussi bien que les autres Français, sont fiers de continuer à parler breton comme leurs vieux pères et ils comptent bien conserver les deux langues.

Le Président du BLEUN-BRUG BRO-GWENED

Marcel BOURIGUEN.

Pierre LE GOUVELLO DE KERIOLET

Né le 14 juillet 1602 à Auray

Il est décédé à Sainte-Anne d'Auray

A l'âge de 58 ans, le 8 octobre 1660.

Préface

Une des physionomies les plus originales de notre histoire, et l'une des plus caractéristiques de notre race, c'est KERIOLET.

Sa vie extraordinaire porte bien la marque de son temps, mais elle porte encore la marque de son pays.

Il naquit au pays d'Auray, au cœur de la Bretagne ; et nul autre peut-être n'a révélé dans ses actes, avec une intensité égale, le tempérament d'un Celte.

Mais, si l'âme bretonne ne varie guère, ses manifestations sont nécessairement diverses, suivant l'influence des milieux ambiants : or, Keriolet vécut au temps des bretteurs, à l'époque de transition entre l'anarchie batailleuse de la Ligue et la piété austère du XVII^{ème} siècle. Aussi, très peu d'hommes ont eu comme lui la passion de l'épée qui provoque ou qui tue ; et, parmi ses contemporains, nul autre n'a eu plus que lui la passion de la haine qui expie et qui transfigure.

Ce n'était pas un rêveur ni un dilettante, ce n'était pas un intellectuel ; ne cherchez pas de la logique dans la trame de ses aventures, il n'y en a pas ; mais, en revanche, on y trouve tout ce que la passion peut suggérer de plus criminel et de plus héroïque, tout ce que le sentiment a de brusque et d'inattendu dans ses évolutions, tout ce qui fait les monstres et ce qui fait les saints.

Ce n'était pas un déséquilibré non plus ; rien n'est livré au caprice dans sa manière d'agir ; ce qu'il a fait, avant comme après la révolution qui a transformé son existence, il a voulu le faire. Lancé dès sa première jeunesse sur le chemin du crime, il l'a suivi jusqu'au bout ; puis, quand il s'est vu brusquement rejeté, comme malgré lui, sur un autre chemin, - il ne s'est pas arrêté non plus à moitié route : avec la même opiniâtreté bretonne qu'il avait montrée dans le mal, il a fait l'ascension pénible de la vertu, et il en a atteint les sommets.

Parfois, en écoutant le récit de ses aventures, on se demande si l'on n'a pas affaire au héros de quelque légende celtique, renouvelée du Moyen-âge !... La vie de Keriolet est un conte merveilleux, en effet, mais c'est un conte réel, vécu, moderne : rien ne paraît plus invraisemblable, et rien n'est plus authentique.

Il est vrai que l'imagination populaire, devant cette existence étrange, s'est très vite émue : autour du merveilleux historique, elle a brodé le merveilleux de ses inventions. Et c'est ainsi que, dans le pays d'Auray, s'est formé peu à peu un cycle important de légendes, dont le héros nous apparaît tour à tour comme un diable et comme un saint.

En ce temps-là, disent les conteurs, il y avait en enfer une chaise fleurdelisée que l'on réservait à Keriolet, parmi les princes du sombre royaume. Et aujourd'hui, à Sainte-Anne

d'Auray, sur la façade de la basilique bretonne, il y a une statue qui reproduit ses traits et qui porte son nom !

Tout Keriolet, celui de la légende et celui de l'histoire, est dans cette antithèse.

Tel est le personnage qui sera le héros de ce drame.

L'auteur n'a pas eu besoin d'inventer, ni de puiser dans la légende ; il s'est contenté de grouper quelques traits de cette vie, les plus caractéristiques et les plus authentiques ; l'histoire a suffi pour rendre son drame saisissant et tragique, à la manière de Shakespeare.

Keriolet est un personnage en effet éminemment dramatique : toute sa vie a été une lutte ardente, avec deux phases très distinctes. Tant qu'il a vécu dans le crime, il s'est débattu contre l'influence obsédante de sa mère ; il s'insurgeait et il se révoltait contre les souvenirs de sa première éducation, et il la subissait quand même toujours. Quand il se fut converti, la lutte changea d'objet, mais non pas d'intensité ; toute la seconde phase de sa vie s'est passée à réagir, avec une ténacité de Breton, contre le souvenir et l'influence de ses crimes passés. – Le peuple, qui a toujours une manière simple et imagée de dire les choses, disait de Keriolet qu'il a passé sa vie à se battre contre la Vierge et contre le diable !

Le moment choisi pour le mettre en scène, c'est le moment de la conversion définitive, l'heure où s'opéra dans cette âme une transformation brusque et radicale : la métamorphose du maudit en élu.

Ce choix nous paraît très heureux ; car, outre que cet événement fut décisif pour augurer la vie de Keriolet dans une direction nouvelle, il y a ici un phénomène d'un intérêt général, et exceptionnellement curieux, surtout quand il s'agit d'un Celte.

On dit communément, en effet, depuis quelques années, qu'il y a dans le Breton un fond de paganisme indélébile, et que le christianisme est toujours demeuré à la surface de notre âme. – Voilà, à coup sûr, un problème intéressant : l'auteur de ce drame l'a franchement abordé, en montrant le tempérament le plus païen de notre race aux prises avec l'influence d'une éducation profondément chrétienne. Tout le paganisme indiscipliné de ses lointains ancêtres revivait en ce Breton, qui se trouvait mal à l'aise, disait-il, d'être emprisonné dans une société chrétienne ; et, antinomie bizarre, il ne manquait pas un jour de plier les genoux pour réciter avec conviction l'"Ave Maria" qu'il avait appris de sa mère !

Mais ce dualisme ne pouvait durer toujours ; entre ces deux puissances le conflit était inévitable, où devait disparaître de cette âme le sentiment qui s'y trouvait le moins vivace et le plus superficiel. Le conflit a eu lieu en effet :

mors et vita duello conflixere mirando. Et cette crise est précisément ce qui fait le sujet de ce drame.

Ce drame n'est pas cependant une analyse psychologique : au Moyen-âge on l'eût appelé de son vrai nom : *un miracle de Notre-Dame*.

Ne cherchez donc pas ici la manière classique, - avec l'étude d'une crise morale qui se développerait avec un intérêt toujours croissant de scène en scène, et se dénouerait logiquement.

Keriolet n'est pas un Polyeucte ; il n'a eu ni les hésitations et les timidités du néophyte, ni l'emballement héroïque du martyr.

Encore une fois, la mentalité de Keriolet est d'un Celte, et c'est bien un personnage de notre race que l'auteur entend présenter aux spectateurs. Si les soubressauts de cette nature ardente déconcertent parfois le moraliste, il n'aura l'explication de ces apparentes anomalies qu'en se souvenant qu'il y a trois éléments qui concourent à former cette personnalité étrange : c'est, dans une âme bretonne, la lutte épique entre le paganisme et le christianisme.

Deux personnages qui entourent le héros principal achèvent de caractériser la physionomie.

Racine, autour du "monstre naissant" qu'était Néron, a placé Burrhus et Narcisse. Mais ici nous sommes en Bretagne ; aussi notre poète, autour du monstre accompli que fut Keriolet, a-t-il mis un *sorcier* et un *pauvre* !... C'est toujours, comme dans Racine, le génie du bien et le génie du mal, dont l'influence se contente et se contrebalance. Mais la couleur locale a changé le paysage en même temps que le cadre historique. C'est encore un drame humain que nous avons ici sous les yeux ; mais, tandis que l'autre se passait partout, celui-ci ne se passe qu'en Bretagne.

(Ar rakskrid-se, e galleg nemetken, n'eo ket sinet.)

EN EUTRU KERIOLET²

Kentañ lodenn
E rakkêr Porh Kerluéz :
en eih a viz Gwenholon 1635

Kentañ pennad
Matelin ha Frañsez

Frañsez

A ! Matelin, nen doh kte c'hwi oeit d'er pardon ?

Matelin

Naren, Frañsez. Re yen e' bremañ me halon
Eid moned da sonnein ha da goroll d'er festeu
El gweharall, pe oé hoah ru' mem bougenneu !

Frañsez

C'hwi e zo bet neoah ur soner hag ur mad !
Ne ve ket bet kavet ho par en ur hornad !

Matelin

Ya, ya, me 'm-eus gouiet paodmad a sonenneu
Mez ne ouian bremañ lared 'med pedenneu !

Frañsez

Er bedenn e zo mad àr diweuz ar re goh.

Matelin

Mez, àr diweuz yaouank, nen deus netra freskoh
Eid diskan ur werzenn d'er Werhez ag en neañ.
Allaz ! Un gwerzenneu ken dous, ker braù, ker skañv.
Hani, e porh Kerluer, ne gred mui o lared
Ged en eun a welet en Eutru kounnaret ;
Hag en ti, hemb sonenn, e zo yen èl ur be'.

Frañsez

Mamm en Eutru neoah, én amzer ma viùé
E vourré braz, me 'gred, é kleved bugalé
D'ar sul, àr er bratell, àr-lerh er gouspéreu
Edan en erùenn vraz é lared gwerzenneu.

Matelin

Mamm en eutru, Frañsez, honneh oé ur santéz !
Ker amd eid en dud, ken dous en ur vestréz
Ha ker greduz, pe oé é pédein, ma kredan
Ema oeit, é verùel, ag en douar 'tré d'en neañ.

² EN EUTRU KERIOLET : miret eo bet an doare-skriva gwenedeg, nemed cheñchet tamm-pe-damm gwechou 'zo.

Frañsez

Più en-dehé kredet penaoz un êl ker gwenn
En-dehé luchennet un diaoul ar hé barelenn !

Matelin

Ya, ya, Frañsez, un diaoul ! Mez é vamm ker santel
E bed eid hou kement ma tey da voud un êl !

Frañsez

Matelin, mar bez gwir er gomzeu e laret
Me 'bêo deoh keneu !

Matelin

O ! me mestréz karet !

Er Baraouiz, pedet ataù, pedet enta
Eid inean peur ho mab kollet, intron Anna !
Gweharall, ha pe oé krouédur ha bihannig,
Doh her gweled kousket, ker glan èl un oénig
En é gavell, édan diwaskell en êled.
M' é hlevé – mamm eüruz – é lared, hemb arsaù :
« Men Doué, chetu me mab ! Goarnet ehañ mad ataù,
Rag gwell e vé genein he gweled é verùel
Eid her gweled é koeh én ur pehed marùel ! »
Hag ur huéh ma oé deit, èl perped, de lared
Er bedenn én hun mésk, kent moned de gousked,
Hi e lakas men dorn én hé dorn ha dousig,
Douisg èl ha pe oé é komz doh hé mabig :
« Matelin, ema-hi, - hag hé boéh a gréné –
Karet me minourig ha gouelnnnet ged Doué
Er péh e houlenann geton-mé-meb bemdé. »
« Goulenn Петра, intron ? » - « Ma vo beleg un dé ! »
Hag a-houde, bamnoz me 'lar me chapeled
Eid ma vo benniget un dé Keriolet.

Frañsez

Hui e laro enta liéz chapeledeu
Rag me 'gred e kollet bamnoz ho pédenneu !

Matelin

Marsé, Frañsez, marsé ; ne hellam ket gouied
Er péh e zo kuhet én amzér de zoned !

Frañsez

Nann ; mez moned un dé d' é gentañ ovérenn !
Ne hellan ket kas boutein er choñj-sen é le fenn !

Matelin

En Etru Doué en-deus groeit treu diésoh hoah
Eid lakaad ur pehour de zond de voud menah !

Frañsez

Ya ; mez henneh ne vo ket hoag menah a-benn !
Kerkoulz 'vehé gwiskein d'en diaoul ur soutanenn !

Matelin

Gorteit, Frañsez, gortiet ! Sepred Keriolet
Nen dé ket hoah marsé ker fall èl ma kredet !

Frañsez

Ne hell ket boud falloh, Matelin. – E galon
He-deus hoah – m'her goar mad - aveid er beurizion,
Un tammig karanté.

Matelin

Hama ?

Frañsez

Mez aveid Doué !

A vintin bet' an nozn hwi her hleu é touied ;
Er merhed yaouank ne hellant ket her gweled
Hemb krénein – èl er hag dirag er jiboésour.
Ankoéhed e hra memeb beteg anù en inour
A-benn pe hwel penaoz o volanté e blég
Dre eun hag é gounnar pé dirag ur yalh eur.
Er homzeu louz e saill ag é galon d'é veg
El er fank di e saù hag e kousi en deur
Ha pa voutjér en don ag ur lenn ged ur vah
Ha hwi e gred penaoz é vo un dé menah
Hga en Eutru Doué memb, ha p'her hav àr é hent ?
En hani ne grén ket memb dirag ar gurun
Hag e tenn àrnehou ! En hani n'edeus eun
A zén erbed, na memb ag é vistr, en diaouled ?
En hani n'en-deus ched eid en dihuenn ér bed
Nameid her gléan ruet liéz é gwed mab-dén
E weler perped én e zorn ?

Matelin

Dirag più ?

Frañsez

Dirag Doué ! Ne gavo ket hani.

Matelin

Eañ e gavo é vamm hag er Huerhez Vari.

Frañsez

Er Huerhez ?

Matelin

Ya, Frañsez – hag hé mamm venniget !
Rag n’her gwélér jamez é voned de gousked
Hemb lared d’er Huerhez un “Ave Maria“
Ha Patronez é vamm e zo santéz Anna !

Frañsez

Hag eañ o douj merhad ?

Matelin

Hga eañ o har eùé.

Frañsez

O harein, Matelin, ged ur galon ker brein ?
O ! nepas ! eañ en-deus treu arall de garein !
E vara pamdeieg e zo er fallanté...
Ha gwell e’ hoah genein biùein ér beuranté,
Hemb kleued en argant é sonein é me yalh,
Gwell e’ genein seùel mintin èl er voualh,
Ha moned d’ur labour kaled é peb amzer,
Kavoud é korn en tan, pe arriùan ér gêr,
E-leh magadur hueg un tamm bara segal,
Youd-mel, youd gunéh-du, pé un tammig kig-sall,
Pé mar a hueh basein g’ur chudellad soubenn
Tanoad ur huéh hembken er blé er bara gwenn,
Eid boud eurus èldou ée bed-men – mez én all ?
Boud eid perped daonet !

Matelin

Marse Keriolet

E vo ér bed arall ‘ne hellam ket gouied)
Eurusoh eidom-ni !

Frañsez

A ! àr me yaouankiz,
Neuzen é vo gwelet en diao ér baraouiz ?

Eil pennad

Matelin Frañsez, Pier (*fillor Keriolet*)

Pier

(*ag er-mêz*)

Ohé ! Frañsez, ohé ! deit de stagein er seud !

Frañsez

A-benn, a-benn – Ne vank hani ?

Pier

Nann. Mez er meut

En-deus klasket kement moned ér park-gunéh

Ma on deit, é rideg àr e lerh, de voud chuéh.

(*Frañsez e ya ér-mêz*).

Matelin

Haam ! Pier, desu amañ, de azi àr er mên

E-tal on, eid gortoz ma sono kourz er goén.

Ha te gousko memb hineah én da huélé.

Pier

Ya, Tonton Matelin, mez é rideg èl-se

Ne lennan ket liez livr en eutru Kuré ?

Hga arhoah ha pa zey d'er lann d'obér skol dein

Ne ouiein ket er péh am-eus bet de ziskein.

Matelin

Hama ! un dé arall, Pier, te labourou gwell

Ar ha livreu. – Mab dén e hra er péh e hell.

Oeit e' marhad ha dad d'er pardon a vintin ?

Lakeit en-deus é sé ataù.

Pier

Ya. Matelin,

Ha me 'béd er Huerhiéz de reiñ dehou sklêrder

Eid ma laro dein "Ya", pe arrio ér gêr.

Matelin

« Ya », Eid petra 'ta, Pier ?

Pier

Eid ma hellein un dé

Boud beleg ha laerd en overenn bamdé

En inour d'er Huerhiez ha de santez Anna !

Matelin

Ha da dad ne venn ket ma vei beleg enta ?

Pier

Nann, Matelin. Mez me 'gleù boéh en Eutru Doué
E lared dein liéz reiñ dehou mem buhé'
Hag « houelnn genein ma labourein eitou
M'he hleù, èl pe vehé é skoein àr me halon.

Matelin

Neuzé ne grénez chet, rag un dé pe un all
Dioué e zigor perped deulagad er ré dall
Da dad e laro "ya". – Mez me 'gred é abuz ?

Pier

Er pardon, Matelin, é oé merhad bourruz,
Hag er chistr e zo mad marsé !

Matelin

Red é' lared
En anderù-men e vo hoah gwélet diùar gwan ?

Pier

Minour Langroez en-deus paset genem, ér lann
En ur sonein. Haneh en-deus kaset d'ar gêr
Un toullad chistr ! E vaoéz étoned àr e lerh
He-doa laret dein mad penaoz he-doa gwelet
Me zad é komz ged en Eutru Keriolet.

Matelin

(a-gosté)

Eid er memb tra merhad – a-zivoud e dachenn !

Pier

Hag un doéré arall, bugul Gwingnér Kerlenn
En-deus hoah laret dein penaoz en-desu gwelet
Deh de noz, Izaak er sorsér, azéet
Er lann vraz, àr ur mên, é skopien doh er loér
Hag é lakaad de grol er chach ag er hartér.

Matelin

A ! gwall àr ze 'man dé deit Izaak en-dro !
Rag be' 'o hoah pèll maleurieu en hur bro !

Pier

C'hwi e gred, Matelin ?

Matelin

Ya, rag ne welan ket
Hemb krenein, er vo-men, er peur-se er peur³-sé milliget !
Laret vehé penaoz, pe dremén én henteu
Er marù, ged e falh dir, e gereh àr e baseu !

³ peur : paour-den.

Pier

Neuzé ! gwarnet⁴ ni mad, o ! Mamm santez Anna !

⁴ gwarnet : gwarnezit.

Trived pennad

Matelin, Pier, Frañsez

Frañsez

Staget em-eus er seurt. – Mez en noz e freska ;
Mall e vo téh dirag en amzer brumennet,
Ha marsé, Matelin, é vo mad deoh moned
De gemér, ér gegin, ho lleh é korn an tan.

Matelin

Ya, Frañsez – Houz aviz e zo mad - hag éh an
D'en héli a-benn-kaer. – Allqaz ! p'em-boé èl oh
Goed gwiù é mem gwahied hag ur galon kriùoh
Ne reden ket dirag ur vrumennig,
Mez un dén koh e zo gwann èl ur hroèdurig.

Pevarved pennad

Frañsez ha Pierig

Frañsez

A ! peur-kêh Matelin ! dén ker mad ! ker santél !
E pedein eid ma tey e vestr de voud un êl.
Eañ e laro merhad hoah mar a chapeled.
Kent ma vo beleget biskoah Keriolet !
Rag me 'gred e houlenn ré ged en Etru Doué !

Pier

Er péh e houlenn eañ, m'her goulenn me eùé,
Hag eid boud cheleuet, me rehé mem buhé',
Men gwed !

Frañsez

A ! bugale, pé kalon eh-ues-c'hwi !
Bugalé ! nen doh ket enta groeit èl om-ni !
Mez c'hwi e zo breudér an Êled ag en neañ
Pen dé gwir e hellet karein er ré fallañ,
Karein Keriolet ! c'hwi ken gwenn ha ker glan !

Pier

Mez, Frañsez, ne garet ket c'hwi ho tad-pèren ?

Frañsez

Êz e karein un dén hag e viù revé Doué !
Mez eid ur haill, biskoah ne rehen mem bué'.
Memb pe vehé reskiz eid é salvedigeh,
En don ag an ihuern en diaoul e hoarn è léh.

Pier

Frañsez, Frañsez, m'hou péd, na gomzet ket èl-se !
Mar deus kenailh èr béd, gwell é pédein eite.
Indeanne en dud fall en-deus koustet kement
D'hur Salver àr er groéz èl ineanne er Sent.
Chetu perag bamnoz me béd, àr-lerh er goén,
Hin mamm santéz Anna, aveid me zad-pèren.

Frañsez

Hama ! me 'lar-me deoh penaoz santéz Anna
Ne hell ket ho cheleu..., nann, nann.

Pier

Perag enta ?

Frañsez

Goudé me laro deoh, kroèdur, aveid petra.
Chetu Keriolet é tond ag er pardon

D'obér em-eus de vould me unan kaer getoñ.
(*Pier a ya er-mêz*)

Pemved pennad

Frañsez, Keriolet

Keriolet

Perag nen doh ket deit dein kent en noz ?

Frañsez

Eutru Keriolet, é oen doh ho kortoz.

Keriolet

A ! A ! E-kourz eh-eus achiuet ho labour !
Un diaoul bennag, merhad, e zo deit d'ho sekour
Eid tennin àr er groez em-boé laret taolein ?

Frañsez

Eid gobér er labour eh eus ordrenet dein,
A zén erbed, Eutru, n'em-esu chet bet d'obér,
Rag, diskar er hroézieu nen dé ket mechér,
Kroéz er Goh-hent enta, perped sonn en hé saù
Biskoah dré men dorn-me ne vo taolet ataù.
Me 'm-eus eañ laret deoh hoah ur huéh.

Keriolet

Malloh ru !

Più en-deus disket deoh komz èl-se d'hous Eutru ?
Nen don ket 'ta ho mestr, ha c'hwi – Frañsez Meitour,
Nen doh kt c'hwi enta meùel ha servitour,
Eid gobér, kent gortoz, er péh e laran deoh ?

Frañsez

Ya, mez be' zo én neañ ur mestr e zo brasoh
Eid er vistr ag en douar, hag hanneh e zihuenn
Oll er péh e zo fall hag énéb d'é lézenn.

Keriolet

Hag hanneh é merhad e bé' ho teùèhieu
Pen dé gwir é kredet disprizein me homzeu
Eid héli é lézenn ha disentein dohein ?

Frañsez

El ma laré ho mamm, Eutru, gwell é sentein
Doh ar Mestr ag en néañ eid sentein doh un dén.
Rah ha pe zey eidom en amzer de dremen,
Ar-lerh er vuhé'-men ker berr 'vel un deùeh,
Me 'yel, Eutru, de glah, ér bed arall, ur léh
Revé me labourieu : mez ne glaskan ket mé
Boud taolet aveidoh én ihuern, an dé zé !

Keriolet

En ihuern ! En ihuern ! Ha peur-kêh dén spontet !
Er bed arall n'en-deus na Doué, na diaoul erbed !

Frañsez

O ! Eutru ! Arsaüet en toudelleu-zé
Pé en neañ àr ho penn, e ya da goéh marsé !

Keriolet

Doué ! En ihuern ! En diaoul ! treu mad evid er ré goh ;
Komzeu gouli e skont er ré gwan èl oh !
Mez eidon-me, biskoah ne grénein dirakte !

Frañsez

Eutru Keriolet, c'hwi e greno un dé !

Keriolet

Me, krénein i dirag più ? Er gurun é tarein
Ne lak ket, àr me fenn, ur vlèùenn de vouljein.
Ha c'hwi e gred penaoz é kréneien, èl ur had ;
Ha pe huèlein gwerso, mar deus ataù diaouled,
Me 'houlenn o gweled ! Mez gouiù int èl pesked !
Phé, diaouled, deit 'ta ! mar doh chuéh é loskein,
Me yey mé, mar karet, d'ho klah ha de dorrein
Ho rañjenneu. Deit 'ta ! Me 'garehe gouied
Mar doh ker kriù èl on, rag n'em-eus chet kavet
Beteg bremen ma far é kornad bro erbed.
Hama ! Hani n'ez a bremen ha p'ho kalùan ?
Deit arhoel de huéled mar dé son penn men gléan,
Her gléan men e strèùas, e-pad e yaouankiz.
Gwed er-walh eid ruein ohpenn teir dor iliz.
A ! A ! Krénein e hret dirag Keriolet !
Diraktou, én ho raog, re all en-deus krénet !

Frañsez

Arsaüet 'ta, Eutru, m'ho péd, arsaüet 'ta.
(A-gostez)
O ! peh un tarh-kalon eud hoh Intron Anna,
Kleuet, a lein en neañ, ho mab é komz èl-se !

Keriolet

Etre da zent, meùel, petra e larez-te ?

Frañsez

Eutru Keriolet, é oen é pédein Doué.

Keriolet

C'hwi ho-po hoar erhoalh d'her pédeien ér lann vraz,
Ar-lerh ma vo taolet kroéz er Goh-hent d'en diaz.
Kereht enta du-hont, a-benn de labourad

Ar he zro, - rag me 'venn, me 'vennn cheleuet mad,
Hé gweled, kent en noz, a dammeu, àr en douar...
Hama ? ... Ne gleuet ket ? Deit oh da voud boar ?

Frañsez

Eutru, nen don ket groeit eid er labourieu-zé ;
Rag, èl pep krechén mad, me grén mé dirag Doué,
Ha ne hrein ket er péh e zihuenn é lézenn.

Keriolet

A ! krecèn milliget ! mar ne sentez a-benn
Me lako mé er gwed de strimpein a da benn !

Frañsez

Skoeit 'ta ! Koursoh e hrein, Eutru, de huéled Doué.
Ha de huéled d'en neañ ho mamm ér leüiné.

Keriolet

Me mamm ! Ha ya ! Me mamm !

Frañsez

M'hé gwél hoah é pédein
Dirag kroéz er Goh-hent...

Keriolet

Hama ! aveid plijein
Hoah ur huéh de m mamm, ne drezein ket hiniù
Ho kalon ged men gléan ; mez mar karet chom biù,
Tehet, tehet a-benn. Rag kent arhoah marsé !
Mar ho kwélan, mem bihannoh a druhé.
Kereht de glah labour de di ur mestr arall.

Frañsez

Eutru, é-pad m'em-bo un tamm baar segal
D lakaad é mem beg, me laro trugèré
D'ho mamm santél en-deus gwarantet mem buhé'.

C'hwehved pennad

Keriolet
(*e-unan*)

Hama ! me mamm, hiniù, c'hwi e hell boud euruz !
Ag un torfet neuzé nen don ket bet kabluz.
Mez aveid plijein deoh me 'zo bet mad ur huéh.
Ya, cheleuet em-eus ur hweh ahoel er voéh
E gomz é me halon hag eh anaùan mad.
Er voéh e garehen mar a huéh ankouéad,
Ha pe lar dein gobér er mad é-leh er fall,
Boéh me mamm, ken tinèr, ken dous èl gwéharall,
Ha pe laérédein : « Pier, dalh choñj a me homzeu,
Pe Doué e gastio kent pell da follèheu !...
Doué ! A ! mar deus un Doué, m'her gortey, hemb krénein ;
Mez edi me féhedeu mar venn un dé me skoein
Èañ me havo, arhaoh èl déh, àr er memb hent
Ar hent a blijadur, ker péhour èl a-gent !

Seihved pennad

Keriolet hag Izaak

A ! chetu ur gomz vad, eutru Keriolet,
Ur gomz èl ma ouiet-c'hwi hembken o lared !
Hag e lak en diaoualed én ihuern, de hoarhein.

Keriolet

N'em-eus chet int lakeit gwall liéz de ouilein.
Izaak – Mez pegourz éh oh-c'hwi deit en-dro ?

Izaak

A-houdé déh d'anderù, Eutru, éh on ér vro.
Me 'zo deit kourz erhoalh eid moned d'er pardon
Hag eid kemer me léh é-mésk er beurizion
E huéler é pédein tro-ha-tro d'er fetan.
Mez allaz ! me yalh-mé e zo chomet ker skañv
El ha p'em-eus laret me sorbienn ketañ.
Ha merhad e vo red dilézel er vechér,
Rag nen dé ket ged plouz na ged geot é viùer !

Keriolet

Mez er hant-skouid em-boé reit deoh er miz paset,
Troeit int de vous àùel merhad !

Izaak

Ya, dispignet.
Mez, Eutru, c'hwi eh-eus argant eidom hun-deu !
N'eh-esu ket hoah pèet dein oll me labourieu.
Ha mar karet rein dein ur blank bennag hiniù.

Keriolet

Malloh ru ! Argant hoah !

Izaak

Na gomzam ket ker kriù.
Eutru Keriolet – En amzér e zo spiz,
Hag aveid ma kleuein, nen dé ket hoah rekiz
Huchein a-bouiz er penn.

Keriolet

Komzam enta dousoh !

Izaak

En eurusted, Eutru !

Keriolet

Penaoz e hellein-mé
Rein deoh, sorsér, un dra e glaskan-mé èùé.

Izaak

Eid boud euruz ér bed, Eutru, ne houelnnan
Nameid biuein é porh Kerluez, é korn en tan.
A vintin bet en noz, èl ur hoh servitour
E laker de zichuèh p'en-deus groeit é labour.
Hag èl a-gent, Eutru, me 'hello hoah marsé
E voned mar a huéh, ér hartér de valé.
Gounid deoh kaloneu mar a vinourézed,
Rag bourruz é biuein er léh man-deus merhed.

Keriolet

Ne hellan ket rein deoh ar péh a houlennet.

Izaak

Neoah, Eutru, me 'gred em-eus eañ gouniet !
Huizet em-eus eidoh liéz.

Keriolet

Péet oh bet !

Izaak

Ne hellér ket, Eutru, péein me labourieu.
Ha c'hwi e hell hembkin prizein en dañjerieu
Em-eus bet de rideg aveidoh ker liéz
Eid lahein er ré all pé klah deoh ur vestréz ?
N'eh-eus ket mui merhad choñj éh on bet stléjet,
Un dé, àr greiz pavé Alré, eid boud krouget,
Ha pe oé kavet marù merh minour Toull-er-goug !
A ! me 'gred éma hoah er gordenn àr men goug !
Pe ne vé ket bet deit en diaoul d'em distagein,
Bremen e vehen bet én un toull é vreinein,
E vreinein én ho léh, Eutru Keriolet.

Keriolet

Hama ! Me rey hoah deoh argant... eur, mar karet.

Izaak

Ne houlennan nitra 'medi biuein é-tal deoh,
Rag me 'zo mé ur hi fidel, boud ma'h on koh !
Ha pa véet emêz, me 'hoarno mad en ti,
Hag hani ne dostey é huéled penn me fri !

Keriolet

Ne helaln ket neoah ho magein eid nitra !

Izaak

Me 'z hoah mad, Eutru, eid gobér mar a dra.
Aveid gobér en treu e hréer hembkin da noz,
Ha pe gemer en dod e zouj Doué o repos.

En treu e hellan-mé gobér, ya, mé hembkin,
Hag e lak er ré-all de goéh àr o deulin !

Keriolet

Haam ! Deit ! Mez biùet é péah ged Matelin.

Izaak

Pé Matelin ?

Keriolet

Un dén santel hag e gar Doué.
Hag en-deus chervijet me mamm a e vuhé'.

Izaak

Na grénet ket, Eutru, me houl, ha pe garan
Lared chapelèdeu èl en dén santéllañ !

Keriolet

Hama ! chomet enta de viùein é me zi.
Bez' vo boud aveidoh, tre ma vo eid er hi.

Izaak

Eid ho trugèrékaad, Eutru, é korn en tan,
Me 'laro aveidoh me chapeled kentañ...
Ne hoarhet ket, Eutru : kerkoulz èl er ré all
Gouiet em-eus pédein er Huerhiez gweh arall :
Liéz mad éh on bet én hé chapel, du-hont,
Ar vordenn er lann vraz e hanaùer "Lann er Mont".
Ho pédet em-eus hi, èl ma ouian pédein ;
Lakeit em-eus goleu dirag hi de loskein.
Mez biskoah er Huerhiez n'hé-deus hi gwelet ?
Eidon mé, m'her lar deoh, Eutru, é gwironé',
Ne gredan ket nag énni, chetu, na memb é Doué !
Ne gredan ket eh eus ohpenn ur Roué ér bed :
En Diaoul é er Roué-sen em-eus perped kared...
Mez er péh e laran ne blij ket deoh, me 'gred,
Pendegwir é chomet mud, hemb lared nitra ?

Keriolet

Ré hir é mar a huéh ho téod, Izaak !

Izaak

A !

E lared deoh er péh em-eus laret a-benn
Eutru kêh, gobér deoh plijadur a garen !
Mez pendegwir...

Keriolet

Kleuet en aviz e ran deoh,
Ha c'hwi e vo marsé ur huéh arall furroh

Tré ma véet lojet ha biùet é me zi.
M'ho ped, ne gomzet ket ag er Huerhiez Vari !
Pe m'ho lakey er-mêz ag er porh, malloh ru' !
C'hwi e gleu, Izaak ?

Izaak

Ya, me gleu mad, Eutru !
Me gleu mad en àèl é huéhein a bep tu
En ho kalon digor èl un ostaleri.
Digor da rah en dud, memb d'er Huerhiéz Vari !
C'hwi e cheleu 'hanoh ! c'hwi e cheleu héna.
Un dé c'hwi e gaùo de zoned devadon
Er sent hag en èled, er Baraouiz a-béh ;
En neañ hag en ihuern tolpet en ur memb léh !
A ! gwéharall, Eutru, c'hwi e zo bet kriùoh !
E chapel ho kalon ne sone 'meid ur hloh !
Ha ne oé ket a-barh 'meid un aotér. Eutru,
Aotér en diaoul, er Roué ag er rouanteleh du !

Keriolet

Kaer en-devo gobér en diaouled hag er sent,
Me halon, Izaak, m'he hleu, èl a-gent ;
Ha ne lakein a-barh nag en diaoul, nag e hoér !

Izaak

Mad ! mez ne vehé ket laret ha p'ho kleuér
E komz ag er Heurhiez ged kement a zoustér,
Penaoz ema, Eutru, ho komzeu e gleuér !
Chomein e hran bamet !

Keriolet

Hama ! c'hwi e vo hoah
Bametoh é houiet penaoz, - èl ur menah
Hag e lar é bédenn bamnoz ha peb mintin,
Keriolet e lar, bamdé, àr e zeulin,
Un "Ave Maria" !

Izaak

Neuzé ! mall e vo deoh
En ur hovand⁵ bennag mond da huskein ur vroh !
Ne vo ket hoarhet kalz àr baùé en Alré,
Ha pe vo kleuet komz ag er mirakl braz sé !
Mez – revé ma huélan – kourz en noz e dosta.
De bédein ho Kuerhiez, Eutru, kerhet enta !
Eidon-mé me chomo hoah un tammig er-mêz
Eid gweled er stired e splann àr borh Kerluéz.
Me huél ur stirenn hlaz é splannein àr er gêr !
N'he-deus nitra kuzet eid lagad ur sorsér :
Eñ e huél oll er péh e vo hag eñ 'zo bet...

⁵ : hovand : gouent.

Ar hoah me laro deoh er péh em-bo gwélet !

Keriolet

Arhoah hembkin ? Hama ! nozeh vad deoh neuzé !

Izaak

Etru Keriolet, nozeh vad deoh eùé !

Eihved pennad

Izaak
(*e-unan*)

Izaak

Ya, sell a-benn d'en neañ, Izaak ar sorsér !
Sell a-benn d'er stired e splann a-drest ar gêr !
A bé bro é ta rah ar stired e huélan ?
Emant èl deulagad digor é fas en neañ !
Nag a stired e splann hineah a-drest me fenn !
Chetu en hani glaz é toned de voud gwenn !
A ! n'en-deus ket nitra kuhet eid ur sorsér ;
Er péh ne houlen ket touchant – breemn m'her gouér.
E livr en ineanne a-houde ma lennan ; -
Ha komañset em-eus lenn a-barh a-vihan, -
Revé liù stirenn me anaù peb inean,
Stirenn Keriolet n'hé-deus chet er memb liù.
Me 'm-eus hi anaùet perped glaz, hag hineh.
Ema deit én un taol de voud gwenn. Mil malleh !
Be' zo unan bennag e labour 'éneb dein
Hag e lak er choñjeu ag é spered de droein ;
Mez boud ma vé red dein, eid achiù me labour.
Er had e vo kent pèll é dorn er jiboésour,
Ha boud ma vé red dein biùein hoah pèll amzér,
E klah bamdé mem boud hag e cherrein mizer.
un dé, Keriolet, o ! diaouled, m'her lar deoh,
En-doa ag en ihuern e hoariou genoh !

Eil lodenn

(E beg “Lann zee Mont“, é-tal kroéz er Goh-hent. Diaviz chapel Mizerikord én achimant a viz Gwenholon 1635)

Ketañ pennad

Matelin, Pier, Gwennael, Loeiz, Bugulion

Matelin

(azéet àr ur mên, é-kreiz er vandenn)

Ya ! mem bugaléigeu ! Gwéharall éh eus bet,
Revé er péh, em-eus dalhmad kleuet lared,
Ur chapelig distér saùet én un douareu
E anùèr a-houdé gwerso er Bosenneu.
N’eh-eus ket ‘med moned de Geranna ur huéh
Hag é vo diskoeit deoh, àr vord en hent, hé léh.
En dud ag er hornad – on tadeu, bugalé !
-Plijeét ged Doué ma helleem-ni gobér èlte –
On tadeu koh enta e yè ‘liéz d’eno
Aveid pédein santéz Anna, Rouanéz er vro !
Er chapel e koéhas, skoeit dre er gohoni,
Hag a-houdé, santéz Anna e oé hemb ti
Mez neoah hé limaj e oé chomet kuhet
En douar – hag àr neh er géot her doe kresket.

Gwennael

Mez, tonton Matelin, hag en dud e houé
Pdenaoz é oé kuhet santéz Anna èl-sé ?

Matelin

En dud ne houient ket nitra, mem bugalé !
Neoah be’ oé un dra hag hur bamé !

Pier

Petra enta, tonton Matelin ?

Matelin

Dén erbed,
Ged éhén na ged seut, na muioh ged roñsed
Ne hellé ket arad én tachad ma oé bet
Gwéh arall chapelig Intron santéz Anna !

Loeiz

Dén erbed ne hellé arad ? – Perag enta ?

Matelin

Rag kaer e oé komz braù, pé komz vil, èl lonned
E arriù én tachad-sen e chome bourdet.

Loeiz

C'hwi eh-eus int gwelet mar a huéh é vourdein ?

Matelin

Nepas, mez n'en-dé ket red gweled eid kredein ;
Er ré en-deus gwelet en-deus eañ laret dein.

Pier

Mez, tonton Matelin, achiùet en istoér !

Rah àr en-dro

Ya, tonton Matelin, achiùet en istoér.

Matelin

Hama ! cheleuet mad ! A-houde pèll amzer,
En tachad-hont enta e oé chomet é poéz.
En dud n'hen trezent ket hemb gobér sin er groéz.

Loeiz

Hemb gobér sin er groéz, tonton Matelin ?

Matelin

Ya !

Mez be' zo unneg vlé, un dén a Geranna,
Anùet Nikolazig, liéz mad e huélas
Dirag é zeulagad, é-kreiz ur splannder braz,
Santé Anna hi-mem. Deho hi e laras
Emen é oé kuhet hé limaj benniget :
E park er Bosenneu én douar é oé kuhet,
Ha chetu, bugalé, penaoz en-deus kavet
Nikolazig limaj un Patronez karet.

Pier

Mez, tonton Matelin, n'eh-eus chet laret dem
Penaoz eh eus gwelet santéz Anna c'hwi-mem ?

Matelin

O ! mem bulagéigeu ! Pé choñj é me spered !
Pé choñj é med halon eh eus-c'hwi dégaset !
Un mamm santéz Anna, ya, me'm-eus hi gwelet.
Ha betag ma varùein ne huélein ket nitra
Braùoh aveidoh-c'hwi, o ! mamm santéz Anna !
E me halon betag memarù c'hi e chomo
Hag é me hunéieu dé-noz mem m'ho kuélo.

Gwennael

Matelin, laret dem enta penaoz é oé !

Matelin

Tri é oem é toned un dé a foér Alré

E miz kalan-gouiañ !... E léh chom da chistrad,
El ma choméer mar a hueh, àr-lerh er marhad,
Doned a reem d'er gêr ha kerhed e reem mad :
Rag en noz a-houdé gwerso e oé mèzeu.
Mez, èl ma arriuem ged park er Bosenneu,
Ni e huélas un dra gwann-kann, un dra hemb par
E splannein en douareu, uhél a-drest en daouar.
E-krezi er solandér-sen, ur vaouéz gwisket é gwenn
Um ziskoas dem, ker lugernuz èl ur stirenn.
Hag a bep ti dehi é oé ur holeuenn
O ! Biskoah àr en douar n'em-eus gwelet nitra
Ker kaer, ker braù èldoh, o ! mamm santéz Anna !

Loeiz

Mez de santéz Anna, petar eh-eus laret ?

Matelin

Nitra, mem bugale – Un-tri é oem bamet,
Hag aveid komz hani ne gavé ger erbed.

Loeiz

En ho léh, Matelin, m'em-behé-me komzet !

Matelin

Ya, ya, te 'lar hoah, mez lomz ne hellér ket.
En téod e chom ér beg èl pe vehé staget :
Un-tri ne hellem ket lared ur gomz hembkin.

Gwennaël

Petra e arriùas àr-lerh ?

Rah er vugale

Petra e arriùas ?

Matelin

Hag én un taol ni e huélas en Intron wenn
E seùel, é seùel, e-kreiz ur gogusenn
Ha doh um goll én neañ, lugernuz èl en dé !
... Péh plijadur eh-eus groeit dein, mem bugalé !
Péh joé é me halon !... Mez c'hwi e hrey hoah dein
Muioh a blijadur, bugalé, é kanein
Ged ho poéhieu ken dous ha ker skañv, er huerzenn
E lareh a-benn-kaer, ér lann, pe arriùen,
Gwerzenn neué santéz Anna, me 'gred.

Er vugale

Ya, ya !

Pier

Ha, tonton Matelin, ne glaskam 'meid un dra :

Gobér plijadur deoh ha de santéz Anna !
Chetu perag éh am a-benn de ganein deoh
Er huerzenn un-eus rah disket ged er ré goh.
Mez c'hwi e sekouro genem ?

Matelin

Ya, mar karet

Tag be' zo gwall huerzo ataù n'em-eus kanet :

Rah àr un dro

Deit om, o ! mamm santéz Anna.

Rouanéz er Vretoned

D'ho pédein àr douar Keranna

En ho ti benniget ;

Deit om oll de houlenñ genoh

Pédein en Eutru Doué

De rein dem nerh eid boud kriùoh

Eneb d'er fallentez !

Er vugale

(o-unan)

Santéz Anna, o ! mamm garet,

Mamm er vugaléigeu,

Lakeit sklêrdér én ur spered,

Nerh én ur haloneu.

Kresket, o ! mamm garantézuz,

Kresket ur haranté,

Eid ho mabig bihan Jezuz

E-pad oll ur buhé.

Matelin

Sellet, sellet, du-hont !... Rid àr-lerh da zeñved,

Gwennaël, ha rid buan, rag emant é voned

Er segaleg !...

Pier

Ya, m'o gwel-me eùé.

Rah àr en-dro

Rid 'ta !

Gwennaël

A-benn ! Eh an de huitellad dehé !

Matelin

Aveidom-ni, kanam, mar karet, hoah ur poz ;

Ni e gavo berroh en amzér é hortoz.

Laram en drived poz eid er gêh peherion

Aveid ma rey dehé en Eutru Doué pardon.

O ! santéz Anna, ni ho péd
Eid er geih péherion,
Eid en ineanneu fariet
Ni ho péd a galon.
O ! mamm, sellet int ged truhé,
Kollet àr en hent fall,
Rag oll emant ho pugalé,
O ! mamm, èl er ré all.

Eil pennad

Gwennael

Matelin,, éma en Eutru Keriolet
Doh ho klah ér lanneg... Chetu eañ é toned.

Loeiz

Hama ! ne chomein ket mé ataù d'er gortoz !

Gwennael

Na mé naket !

Matelin

Hama ! mar groa me mestr eun doh,
N'eh-eus chet 'meid un dra d'hobér : kerhed pelloh !

Pier

Mar karet, Matelin, me chomo-mé genoh.

Matelin

Nonpas ! Gwell é moned ged er ré all de hoari,
Rag eid hoari, me 'gred, bourrusoh é boud tri.

Pier

Mad enta ! kenevo, tonton.

Matelin

Ya, kenevo !

Trived pennad

Matelin

(e-unan)

En Eutru, é rideg àr me lerh, a-vintin !

Méchal ! petra en-deus eañ hoah de lared dein ?

Choñjeu fall e dro hoah merhad én é spered

O ! kroéz santel hiniù é véet diskaret !

Pevarved pennad

Matelin, Frañsez

Frañsez

Diskaret ? Matelin, petra eh-eus laret ?
Biskoah, tré ma vein biù, er groéz ne vo taolet !

Matelin

A ! Frañsez ! Hui amen !

Frañsez

Ya, mé-mem, Matelin.

Amen é tan liéz, de noz pé de vintin,
Eid gwarn kroéz er Goh-hent e vér é klah torrein.
Mez m'her lar deoh hiniù èl déh, tré ma viùein
Ne vo ket hi gwelet àr en douar, a-dammeu !

Matelin

A ! Plijadur em-eus é kleued ho komzeu !
Hui 'vo krechén⁶ Frañsez, èl un tadeu ?
Mez a-houdé ma oh lamet a borh Kerluéz
E pé ti eh-esu hui kavet labour, Frañsez ?
Più en-deus ho maget ?

Frañsez

Matelin, àr en douar

Er labour ne vank ket 'meid d'an hani e gar.
E pep kêr é kavan a labour.
Rag me 'zo, Matelin, deit de vous deuèhour.
Me 'ya, a gêr da gêr, mem benùeg àr me skoé,
Hag èl-sé me zisko mar a dra, é valé.
E strepein lann é oen hiniù ged Job Kerien,
Ha n'em-eus ho kleuet e kanein, hag a-benn
E trohien d'er berrañ, me 'zo deit d'ho kuélet
Ha da houlenn genoh doéré Keriolet.

Matelin

Kent pèll é vo amen, Frañsez, ha mar karet
Gortoz, kroéz er Goh-hent ne vo ket diskaret.

Frañsez

Me hortey, Matelin.

Matelin

Mad, Frañsez.

⁶ krechén : kristen.

Frañsez

Me 'chomo !

Betag ma vo er groéz a-blad ha... m'her laho !

Matelin

O ! Frañsez !

Frañsez

Eid en dud sao éneb de Zoué

Ni un-eus bet betag bremen ré a druhé

Mez m'her hleu é toned, ha gwell é dein marsé

Bet ma oa arriùet um dennein a-gosté.

Matelin

Ya, Frañsez, mad e hret.

Pemved pennad

Matelin, Keriolet

Keriolet

A ! me hêh Matelin !

Ar ho lerh é ridan ér lanneg, a-vintin !
Rag hui hembkin e hell hiniù me honfortein !

Matelin

Un doéré braz eh-eus enta da lared dein,
Etru ?

Keriolet

Ya, Matelin, ya, un doéré hemb par,
E vennan lared deoh ketañ, rag hui em har !

Matelin

O ! me mestr ! ho karan ! Dén erbed àr en douar
Ne hell karein un dén muioh eid ma karan
Mab er santéz en-desu – bet hé êr devéhañ –
Groeit kement a vad dein !

Keriolet

Matelin ! – a-houdé kreiznoz, me ‘gred é Doué !

Matelin

Petra eh-eus laret ? Etru, mar plij, genoh ?

Keriolet

Me ‘lar penaoz me ‘gred é Doué kerkoulz èldoh !

Matelin

O ! laret hoag, Etru, er péh eh-eus laret !
Laret hoah é kredet é Doué !

Keriolet

Ya, ya, me ‘gred !

Matelin

Mez perag é krénet é lared kement-sé ?

Keriolet

E me léh ne vern ket pé dén e grénehé.
Ha hui memb é me léh hui ho-pehé krénet
E huéled, en nihour, en treu em-eus gwelet.
Ya, krénein e hran hoah hag ataù me ‘gréno
Ken ne houlein penaoz men Doué em fardono.

Matelin

Eutru, ne zoujet ket a-zivoud kement-sé.
Rag pardonein e zo mechér en Eutru Doué !
Mez laret dein, m'ho ped, er péh eh-eus gwelet,
Laret dein buan penaoz Doué en-deus ho skontet !

Keriolet

O ! Matelin, un noz a-béh em-esu paset
En don ag en ihuern é-mesk er ré dannet !

Matelin

Hag en diaouled, Eutru, n'-deus chet ho kwarnet ?

Keriolet

Nann, Matelin !

Matelin

Hama ! unan bennag kriùoh
Aveid rah en diaouled e zo a-du genoh.
Santéz Anna, Eutru, en-deus ho kwarantet,
A ! trugéré dehi ha d'hé merh venniget !
Mez laret dein, Eutru, en huné eh-eus bet !

Keriolet

En péh em-eus gwelet nen dé ket un huné,
Matelin.... Oeit e oen é kourz mad d'em gulé
Hag àr-dro kreiz en noz (dihousket mad e oen)
En un taol m'um santas é-tiskenn, é tiskenn,
Ke buan èl ur lomm glaù e goeh ag ur goabrenn,
En un toull don ha stréh èl ur puñs, ha tihoél
El en noz ha pen dé rah er stired kuhet.
Ha dichennein e hren èl-sé – korv ha spered –
Men deulahad skontet, digor é-kreiz en noz,
Hag hemb gouied petra e oé doh men gortoz.

Matelin

O ! me Salvér Jézuz !

Keriolet

Ha kent pèll me goéhas
E-tal dor en ihuern – An neh me huelas
Ged letrenneu ru-flamm er gerieu-men skriùet :
« Eid birùikin me hoarn er ré em-eus lonket ! »
Me huélas un toull don, ker stréh èl ur beg-forn
Hag un diaoul her goarné, ged ur forh én é zorn.
Hag ur huéh, ma oen oeit donig mad én toull-sé,
E-kreiz en dihoélded a bep tu me huélè
Aeron louz ha priñùed àr er fank é ruzein
Ha touseged gludeg é saillad én-dro dein !
Me 'gerhé én o mesk, hemb kleued trouz erbed.

Hoant em-boa de grial ha komz ne hellen ket.
Ged er fall vlaz e oé eno mougein e hren ;
Hag èl pe vehen bet é-kreiz ur houiliadenn
Un tan biù é me horv, hemb arsaù, e verùé
Hag étré peb diù huéh ur voéh e houlené :
« Ped êr e zo sonet ? » - Hag er reskont e oé
Ur gir hembkin, perped er memb ; *Eternité* !
Hag oll er ré de hudal, ha de skrignein o dent.
Hag é kleùet o boéh, me choñjé, Matelin,
Penaoz e oén, èlté, dannet eid birùikin,
Ha me halon e oé tarhet ged en ankin !

Matelin

Ha penaoz éh-eus-hui groeit eid doned ér-mêz
Ag en ihuern, Eutru ?

Keriolet

Eh obér sin er Groez

Haq é lared, a-bouiz me fenn, anù er Huerhiéz.
Er Huerhiéz ag en neañ en-deus kleùet memb boéh,
Hag um gavet em-eus é men gulé kentéh,
Biù ha dihunet mad ! ... Mez àr-lerh, Matelin,
Ar-lerh ! – é me spered, péh skont ! ha péh ankin
Ha pe huélan er fank e zo é me halon !
A ! Matelin, penaoz goulenn ged Doué pardon !
Eid moned betag Doué émen éma er skèle ?

(Ar e zeulin, dirag er Groéz)

O ! Jézuz, me Salvér, dirag ho Kroéz santel
El ur péhour gronnet a béhédeu méhuz
M'um daol àr men deulin, hag ho péd, o ! Jézuz
De zizamm me inean a-véh hé féhedeu
Ha d'hé golhein hi-memb é goed ho koulieu !

Matelin

Ha hui e gred, Eutru, penaoz en Eutru Doué
Ne hell ket ho cheleu ha p'her pédet èl-sé ?

Keriolet

Matelin, me 'zo bet ker fall betag hiniù !

Matelin

Mab-dén e hell gwellaad é stad, tré 'mañ dé biù !

Keriolet

Ar me hent n'em-eus chet hadet 'medi fall lezeu.

Matelin

Hui e hell o loskein é tan er vertuieu.

Keriolet

E me halon n'en-deus 'meid fank ha lousteri.

Matelin

Ged un taol chubelenn, hui e nêtey en ti.

Keriolet

Eid hen nêtaad, me 'hrey oll er péh e zo red ;
Mez àr-lerh, Matelin, àr-leh ma vo skarhet
Ha me inean er fank e zo tolpet enni ?

Matelin

Ar-lerh ? Doué e ziskoey deoh en hent de heli.

Keriolet

Eid er beherion vraz èl on-mé, Matelin,
B'eb-deus eid mond d'en neañ nameid hembkin.

Matelin

Gwir e laret, Eutru , n'en-deus nameid un hent
En hini en-deus kaset d'en neañ kement a sent.
Hag eh anùer hent skoselleg er Benijenn.
Hama ! Kerhet a-borh hag hemb distroein ho penn
Aveid selled àr-drañ ho kein, héliet eañ
Betag er penn, de lared é, betag en neañ !

Keriolet

Eid gobér penijenn a mem buhé paset
En ur voustoér bennag éma red dein moned,
Matelin, ha chetu perag em-eus choñjet
Moned àrhoah de skoein àr dor kovand er Champ.

Matelin

A ! Perag éma marù,en intron vad, ho mamm !
Eutru, hi e vehé bet hiniù ken euruz
E hueled hé mab Pier, én hent mad ker greduz !
Ya, kerhet d'er hovand de hobér penijenn,
Hag ho kalon, eno e zey da voud ker gwenn
Ma chomo en êled bamet doh hé gweled !

Keriolet

D'er sent ha d'er Huerhiez en-deus men gwarantet
Dam, Matelin, un-deu de lared trugéré.

*(Er lann, kleùein e hrér er vugalé é kanein en drived poz a
huerzenn santéz Anna).*

Matelin

Dam de gejein ur boéh ged boéh er vugalé.

Huéhved pennad

Frañsez
(e-unan)

E oen azé, àr-drañ er garh é cheleued,
Ha kleuet em-eus rah er péh o-deus laret.
Hama ! Be' zo un êr hembkin m'em-behé bet
Reit (boud ma n'en-don ket pinùig) a galon vad
Oll er péh e hellan gounid én ur bléad.
D'en hent e vehé bet deit de lared dein
Penaoz éh é kent pèll Keriolet d'um rein
Korv ha spered de Zoué ! – Chomein e hran bamet !
Ar paùeieu Alre ne vo ket hoah komzet !
A ! Hui e hré, Eutru, goab ag en Eutru Doué !
Ar en ihuern, àr en diaouled hui e hoarhé !
A ! A ! ne laret ket hiniù er memb sonenn !
Komzein e hret bremen a hobér penijenn !
Ha gwell a zé, neoah ma toujet bremen Doué !
Ar-lerh ma kerheet pèll amzér én hent-sé,
Ha ne zey ket hani de zistroein ho spered !
Mez me 'gleu trouz... E ta unan bennag, me 'gred ?

Seihved pennad

Frañsez, Izaak

Frañsez

Izaak ! A-vintin ér lanneg !

Izaak

Ya, Frañsez.

Frañsez

Er hi, boud man dé koh e ya hoah de jiboës.
Ur had bennag e zo hoah merhad de dapein.

Izaak

Ma n'eh-eus chet komzeu braùoh de lared dein.

Frañsez

A ! n'en-doh ket enta én imur a vintin !
Red e vo dein touchant komz deoh àr men deulin !
Mez... mar karan komz braù, hui e laro marsé
Perag en ho kavan ér lanne é valé.

Izaak

El rah er grechénion, en droed em-eus merhad
De zond dirag kroéz er Goh-hent de batérad.
A ! kleuet ! Ne vo ket ur marmouz èl oh-hui
E zihuenno dohon a bellaad ag en ti
Aveid doned amen, dirag kroéz er Salvér,
De lared peb mintin ha bamnoz me fatér ?

Frañsez

O ! o ! kabderù ! chañjet eh-eus enta mechér
Mar dé é pédein Doué é pased hos amzér
Laqreïn e hréer ataù é ta spered d'un dén
E kohaad : Koheit mad eh-eus, me zad pèrén !

Izaak

Arsaùet e farsal, Frañsez, rag n'en don ket
En imur de hoari hiniù, èl ma huélet.

Frañsez

A ! m'em-boé un doéré neoah de lared deoh,
Un doéré braz.

Izaak

A ! Pé doéré, mar plij genoh ?

Frañsez

Un doéré hag e hrey d'ur hrechen mad èl oh

Ur blijadur hemb par.

Izaak

Komzet buannoh enta !

Rag n'em-eus chet amzér de goll genoh.

Frañsez

Hama !

Cheleuet mad, kenderù Izaak, cheleuet !

Hag aveid kleued gwell men doéré, digoret

Ho skouarn klei' kerkoulz èl ho skouarn déheu !

N'eh-eus chet mui doéré a lared pédenneu

Eid ho mestr en Etru Keriolet !

Izaak

A ! A !

Ne vo ket mui moyan d'her honvertis enta ?

Ged er hêh Matelin, pédein e hren néoah

Eid ma vehé bet deit un dé de voud menah.

Frañsez

Hama ! Ho pédenneu de Zoué en-deus plijet

Pendegwir en-deus int hiniù mem cheleuet.

Izaak

A !

Frañsez

Ya, Keriolet, spontet dré un huné

A-houdé en nihour e gred eh-eus un Doué.

Hag eh a de voned hiniù memb de houlenn

Ur léh én ur hovand eid gobér pénijenn.

Izaak

A ? A ! De bé kovand, mar plij genoh ?

Frañsez

Oeit é

De skoein àr dor kovand er Champ 'la en Alré !

Mez èl ma'h a perped àr-lerh é vestr er hi,

Chetu en hent azé, mar karet hen héli...

Izaak

A ! mil malleh ! Merhad n'eh-esu chet kin mechér

Meid spontein er ré all ha lared geùier !

Hama ! Hui e houlo petra e gousto deoh

En-devo bet èl-sé groeit goap ag un dén koh !

Diwallet ma houého àr ho penn malloh Doué !

Frañsez

N'em-eus chet laret deoh nameid er huironé,
Izaak, mez me 'gred é vehé bet gwell dein
Komz deoh a dreu arall !

Izaak

Kentoh eid me chokein !

Ha mar hoarhet hiniù, hui e ouelo marsé
Ya ! ya ! mez m'her lar deoh, kent pèll ho po ké
Arhoah !

Frañsez

O ! o ! Klaskein e hret hoah me spontein !
Mez ne vo ket hoah hui em lakey de grénein !
Ha pendegwir n'en-deus amen 'meidom un-deu,
M'ho péd de cheleued, hemb trouzal, me homzeu !
A-werso, m'ho anaù, Izaak, a-werso
E houlan rah en droug eh-eus groeit é mem bro.
O ! er homzeu 'eneb de Zoué eh-eus laret,
O ! en torfeteu louz eh-eus groeit.

Izaak

Arsaùet !

Frañsez

Gorteet ! mar plij genoh ! n'em-eus chet hoah achiù !
A-werso é ouian eùé penaoz hiniù
E oé deit deoh dodn amen aveid gobér
Un dra e hra hembkin en dud a ho mechér !
Un dar ken divalaù, ma faot un dén èl oh
Eid her gobér...

Izaak

Eid komz, dam mar karet pelloh !

Frañsez

Nepas, komzam amen, Izaak er sorsér !
Amen, é-kreiz er lann, dirag kroéz er Salver
Er groéz saùer amen aveid un gwarantein
Hag e glasket, hui, dén milliget, diskarein !

Izaak

Mé ! Diskarein er Groéz ! chetu hoah un doéré !
Mez ne gaveheh ket ur hrechen èl on-mé
E parrez Pleuignér a-béh, na tro-ha-tro !

Frañsez

Hui ! ur hrechen ! Un diaoul kentoh deit én ur bro,
Eid hadein en un mésk lezeu er fallanté.
A-vintin bet' en noz, petra 'hret-hui bamdé ?...

Izaak

Lared me chapeled, Frañsez, ha pédein Doué !

Frañsez

Ya ! En dé ma oh deit de viùein de Gerluéz,
Ar-lerh m'en-doé 'n Eutru mem boutet ér-mêz.
Hui eh-eus groeit er min a chañjein a vuhé !
Er parkeu hag ér hoed, peb unan ho kwélé
Ged ur hoh chapeled én ho torn é valé !
Mez er blei' n'en-doé groeit 'meid trokein é grohenn,
Ha lakaad de holein é sé du ur sé gwenn.
Mez, kanderù, a-houdé gwerso é huélen-mé
Ho lagad luemm édan bordenn ho tok neué !
Un dén èl oh e hell chañjein a huskamant,
Hag en diaoul mem e hell kemér dillad ur sant
Aveid lakaad en dud mar a wéh de fari ;
Mez un dé pé un all é wéler penn é fri.
Hama ! gwélet em-eus penn ho fri-hui hiniù :
Mez, tad-pèrén, haneh n'en-deus chet chañjet liù.
N'en dé ket aneho èl er stired haneh !
En anaùein e hrér p'her gwéler ur wéh !

Izaak

Mé ? Dirag un tamm mên plégein me fenn ! Jaméz !
Nann, jaméz ne blégein me fenn dirag ur Groéz ?

Frañsez

Gwah arzé aveidoh, neuzé... Ola ! Paoterd,
Deit amen de wéled lorbour ho hoérézed !

Eihved pennad

Frañsez, Izaak, Ivon, Bihui, Gwigner

Ivon

Petra e zo, Frañsez ?

Frañsez

Sell, Ivon !

Ivon

Er sorsér

E oem é klah tapein a-houdé pèll amzér !

A ! sorsér milliget ! Arriùet é ho tro

De béein dem en droug eh-eus groeit én ur bro !

Gwigner

Ne dé kte hui en-deus gwéharall reit un dram

De me yontr a Gervel ?

Bihui

Hag un all de me mamm ?

Ya, mar dé marù me mamm, o ! sorsér milliget,

Be' zo deg vlé bremen, hui en-deus hi lahet !

Frañsez

(da Izaak)

Hama ! ne laret ket nitra ?

Ivon

Na me zud-me

Hui, sorsér, e zo kaoz man dint bremen er bé !

Frañsez

De begement eh-eus hoah groeit kemend arall !

Hui e zo bet er mestr ér hornad gweharall

Rah en Eutru a borh Kerluéz ho tihuenné

Mez, sorsér hemb kalon, arriùet é en dé

Ma n'en-deus chet mui dén erbed eid ho tihuenn.

E ! Paotred, én ho sah n'eh-eus chet ur gordenn

Aveid pignein er labous-men é blein ur wéenn ?

Bihui

Chetu, unan prenet dilun ged er Malord.

Ya, dilun dévéhañ é foér Vizérikord.

Frañsez

Mad, Bihui ! Trugéré !... E ! sorsér, n'eh-eus chet

Nitra de lared dem na de Zoué kent moned

De weled mar dé frèu en diaoul, ho tad-pèren ?

Izaak

Goulenn trué genoh ne dalv ket kalz er boén.
Rag ho kalon e zo ket kaled èl ur mên.
Mez mé houlen genoh un dra, un dra hembkin ;
Laosket mé de viùein betag arhoah vintin.

Frañsez

O ! O ! kansort, ré bèll eh-eus déjà biùet.
Gwell é lahein er blei' kentéh mann d'é tapet.
Ousta ! hop ! En ho saù, a-benn !... Ha kuit, paotred,
Kloumet én-dro d'é houg er penn ag er gordenn.

Izaak

A ! Red é ma koého er gurun àr ho penn
Ged memalloh !
(Kleuein e hrér er vugalé é kanein, ér lann).

Frañsez

Ola ! dam buan, potred, dam buan !
De grougein ar sorsér, rag me 'gred é kleùan
Boéhiu er vugalé ér lanneg é tostaad.

Bihui

Hastam enta, gobér un labour !

Naved pennad

Er baotred, kuré Pluigner

Er huré

Deùeh mad

Deoh, paotred, deùeh mad !

Bihui

E ! En Eutru kuré !

Er huré

Ya, mé-mem ; mez émen é stléjet hui çlsé

Er hêh dén men ?

Ivon

Hama ! Eutru Kuré, sellet.

Gwell e vehé bet deoh, me 'gred, nepas doned

Kerkoulz-men d'er lanneg !

Er huré

Perag enta, paotred ?

Ivon

Rag àr-dro er sorsér eh em de labourad.

Er huré

A ! Izaak e zo genoh ! M'hen anaù mad.

Frañsez

Ya, eh em d'her lakaad un tammig de zañsal

En àùel, eid gouled ma oui gobér er bal

Kerkoulz èl ma ouié rein d'en dud é zrammeu !

Ivon

Ya, eh em d'her hrougein aveid e dorfeteu.

Er huré

Hama ! Sellet, paotred, ur fall labour e hret.

Kent kondannonein un dén, red é ma vo jujet.

Ivon

A ! Eid hanen n'en-deus d'obér a varn erbed.

Kabluz é, oll en dud her goui mad ér harter.

Hag é pep ti, Eutru, é varù e houlenner.

Bihui

Ha ne vo ket gwélet kalz a dud é ouilein

En dé ma vo laret eh eer d'hen interein.

Er huré

Ne vern, paotred, ne vern. Ha kaer e vo laret,
Lakaad un dén d'er marù èl-sé ne hellér ket
Nemed a-berh er vistr ag er vro.

Frañsez

Ha neoah,
Ni a ya de lahein haneh hag a-benn hoah,
Rag marsé ne gavéem ket en tu arhoah
D'her lakaad de béein oll er péh e zeli.

Er huré

De biù é fell eañ un dra bennag !

Er pevar àr un dro

Dem-ni !

Frañsez

Eañ é en-deus lakeit de verùel mamm Bihui.

Gwigner

Eañ e zo kaoz man dé mem brér-me mahignet.

Job

(arriùet àr-lerh er ré all).

Me hoér-me e zo marù. Eañ en-deus hi lahet,
Lahet de uigent vlé, é-kreiz hé yaouankiz,
Un noz ma oé é tond ag ur fest é Brambiz.

Frañsez

N'en-deus chet àr en douar hani falloh eid hon⁷.

Er huré

Hama ! n'en dom ket ni eùé keih péherion ?
Ha Doué neoah ur laosk à en douar de viùein.
Er grenchénon, paotred, e zeli pardonein ;
Sellet àr-drañ ho kein, sellet più ur cheleu ;
Un Doué marù aveidom, aveid un féhedeu.
A ! un Salvér eañ-memb, dré mem beg e houlenn
Genoh lared eh-et de bardonein a-benn.
Sellet, paotred, é zeulagad lan a drué
Aveidoh eañ en-deus reit é wed, é vuhé,
Genoh eañ e houlenn boud truézuz eùé.

Frañsez

Hama ! El un Salvér, pardonam.

Rah

⁷ eid hon : evitañ.

Ya, Frañsez.

Frañsez

Pardonam d'er sorsér, amen, doh troed er groez.
A ! sorsér, hui e hell lared mad trugéré
D'un Salvér Jezuz-Krist ha d'en Eutru Kuré.

Izaak

Ya, ur bédenn bennag e larein aveité.

Frañsez

Hui e hell moned kuit, mez neoah kent pellaad
M'ho ped de cheleued hoag ur ger : kleuet mad.
Izaak, ag hiniù pelleit ag er hornad.
Kerhet a-benn ér-mêz ag er vro, rag marsé
Ne veem ket aveidoh ken truéuz bandé.
Kerhet d'ur vro arall de wéled er stired.

Izaak

Mad, mad ! me zalho choñj ag ho komzeu, paotred,
Un dé ni e hello hoah marsé um gweled.

Frañsez

Gwah àr-zé deoh neuzé !

Izaak

(étré é zent)

Koéheun e hrey àrnoh
Er gurun ag en neañ, paotred, ged me malloh !

(Er huré hag er baotred àr o deulin dirag er groéz e lar :
Pardonet dem un ofañseu èl ma pardonam d'er ré en-deus un
ofañset)

Kleuein e hrér er vugalé é kanein- :

O ! santéz Anna, ni ho ped
Eid er geih péherion.

Er huré

Paotred vad eh-eus groeit pardonein d'er sorsér.
N'eh-eus chet moned bremen euruz d'er gêr,
Euruz èl krechénion en-deus groeit o dever.

Ivon

Kenevo deoh enta, Eutru, ha deùeh mad.
Eh am d'en douareu braz en-dro de labourad.

Er huré

Hui e hra mad, paotred.

Er baotred

Kenevo deoh, Eutru.

Er huré

Kenevo !

Frañsez

D'er lanneu eh an-mé de me zu.

(Frañsez e ya ér-mêz dré en tu deheu, er ré all dré en tu klei')

Degved pennad

Er huré
(*e-unan*)

Men Doué, mad em-eus groeit hen tennin a zañjér.
Mad em-eus groeit héli gourhemenn un Salvér
E lar dem pardonein memb d'er péhour brasañ
Neoah doned eh ra ké⁸ dein, ha pe choñjan.
Penaoz é vehé net gwéll o lezel marsé
De gas er sorsér fall dirag en Etru Doué....
Groeit en-deus ér vro-men kement a fallenté,
Ma héllér her lakaad d'er marù hemb barn erbed,
Rag en dud a-werso en-deus eañ kondaonet.
Mez un dé pé un all é vo ataù trué,
Ha ne vein ket dalhmad doh hen dihuein èl-sé...
Mez koll e hran, me 'gred, ér lanneg, me amzér ;
Emen éma chomet hiniù me skolaér,
Eañ ken aketuz eid arriù perped d'en ér ?
Mechal ! émen en-deus eañ daléet hiniù ?
Liésañ ér lanneg a-benn ha pe arriù
E ta amen é-tal er groéz de studiein
Er péh e hran dehañ en dé kent de ziskein.
Spered en-deus ha poén e lak de labourad ;
Un dé me 'hello rein de Zoué ur béleg mad.
Chetu azé é seut hag é zeñved... Merhad
Nen dé ket er bugul gwall bèll doh e vandenn.
(Huchal e hra un taol pé deu : Pier, Pier).

⁸ ké : keuz.

Unnegved pennad

(Pier e raiiù, harpet àr Frañsez)

Er huré

Frañsez

Talvei e hra er boén, Eutru, en dout trueé !

Er huré

Petra e zo, Frañsez ?

Frañsez

Sellet, Eutru kuré,

Chetu penaoz é pé ur sorsér er pardon
En-deus reit peb unan a nam touchant dehoñ,
Un taol koutell en-deus bet er hêr Pier getoñ.

Er huré

Un taol koutell ? Emen ?

Frañsez

Sellet ! En é galon !

Pier

(a-boén ma hell komz)

Eutru Kuré, ha huii, Frañsez, mar me haret,
Boud ma varùein hiniù, m'ho ped, ne ouilet ket
Er marù ! mez a-werso em-eus eañ goulennet.
Mar dé rekiz aveid ma vo un dé salvet
Inean me zad-pèren ! – Perag eh-eus-hui ké,
Frañsez, ag er pardon eh-eus reit é anù Doué ?
Pardonam evid ma vo pardonet dem un dé !

Frañsez

O ! kroédur, péh kalon !

Er huré

Pier, droug eh-eus ataù ?

Pier

Ya, ne hellan ket mui, Eutru, chom e me saù.
Lakeit mé de azi aman doh troed er groéz.
Mad èl-sé ! De me zad, hui e laro, Frañsez,
Penaos é vo me choñj getoñ betag en dé
Ma tey eañ de wéled eùé en Eutru Doué.

Er huré

Groeit e vo, me hroédur, revé ho volanté.

Pier

Kenevo deoh, Frañsez ! Ha deoh, Eutru Kuré !

*(Kleuein e hréer en Anjelus é sonein é chapel Mizérikord.
Er parkeu en dud hag er vugalé e gan er bédenn d'er
Huerhiez).*

Chetu kreisté ! Plégam er penn,
El pe saù korv en ovérenn,
O ! Guerhiez venniget !
O Pia !
Ar en daour béet mèlet !
Ave Maria !

Teirved lodenn

(E raker Porh Kerluéz, dé gouil Santéz Anna, 1637).

Kentañ pennad

Matelin

(é-unan)

Allaz ! allaz ! Perag nen don ket marù, men Doué !
Kavet em-behé bet ahoel er peah ér bé !...
Perag nen don ket marù koursoh ! Allaz ! Allaz !
Marù, e vehen net ken euruz, pe geméras
En hani e garan kement en hent d'er Champ !
Euruz em-behé bet, én neañ, lared d'e vamm :
« Pèll er-walh, o ! intron Anna, eh-eus pédet !
Béet euruz, rag ho mab en-deus ho cheleuet ! »
Oeit e oé d'er hovand eid gobér penijenn.
Allaz ! Er gwall-spered e wélas én é benn
Hag àr-lerh deu pé tri miz, chetu eañ ér-mêz.
Chetu eañ én é borh, falloh aveid jaméz !
M'he gwél hoah è arriù ur mintin, é Kerluéz
Ged ur verh a uigent vlé en-devoé lorbet,
Pegemnt a-houde en-deus amen paset,
Hag e zo bet lodeg en é blijadurieu.
Kornal e hré en dudged e douiadelieu,
Spontein e hré en dud é kleued é gomzeu !
Biskoah n'em-boé ket eañ kleuet é kom èl-sé
Ag er Hurhiez Vari, ag er Sent hag a Zoué !
Laret vehé penaoz n'en-doa chet choñj erbed
Ag en huné spontuz en-devoé eañ lorhet !
Pé ma komz anehoñ, é ma aveid lared
Penaos nen –deus ér bed nag ihuern, na diaouled.
Men Doué, men Doué, perag nen don ket marù koursoh ?

Eil pennad

Matelin, Ivon

Matelin

A ! Chetu hui, Ivon ! Re vo er peah genoh !

Ivon

Petrag é komzet hui ag er peah, Matelin ?
Oeit é ér-mêz a me halon eid birviken !
Mem bléu memb e zo deit, Matelin, de voud gwenn
A-houdé man dé marù en hani e garen.
A-houde ma viùan me-unan é me zi,
E me zi, hemb kroédur, ker yein ha ker gouli.

Matelin

Peurkêh tad, me gompren ho poén, ho poén hemb par,
Koll er pèh e garér er muiañ àr en douar
E zo dalhmad kaled id mab-dén... Mez er holl
El ma'h eus-hui kollet ho kroédur, àr-lerh oll
Ho maleurieu arall, e zo kaletoh hoah.
Ho kalon a zeli boud tarhet, mez neoah
Saùet ho teulagad, Ivon, trema en neañ
Hui e welo pénaoz nen doh ket ho-unan.

Ivon

Allaz ! geo, Matelin, é me-unan ér bed.
Red e vo dein kohad hemb plijadur erbed...
Kohad hemb boud karet hag hemb karein hani !
Er marù, é triuéh miz, en-deus skarhet me zi
E skoein, me moéz... me faotr... hag én o raog me merh,
E me halon feuket ha ker yein èl en erh,
Nen deus chet mui, allaz ! tamm karanté erbed !...
Karein en Eutru Doué eañ memb ne hellan ket.
Perag eùé é ma eañ eidon-mé ker kri' ?

Matelin

Rag eñ ho kar, Ivon, muioh aveid hani !
En Eutru Doué ne sko ker kriù-sen, a-du arall,
Nameid er ré e gar muioh eid er ré all.
Perag eùé, Ivon, boud perped é choñjal
En ho stad-hui, kentoh eid é hani er ré all ?
Choñjet eùé penaoz er ré eh-eus kollet.
E zo euruz én neañ... hag hemb ankin erbed :
A-houde man dint marù ne gleuet ekt o boéh,
Ha pe dosta en noz é komz deoh mar a wéh...
A ! mar karet cheleu o boéh karantéuz.
Memb é-kreiz ho poénieu hui e viùo euruz.
Ivon, betag en dé ma tey ho tro eùé
De voned de viùein d'er Baraouiz geté !

Ne gredet ket er péh e laran deoh, Ivon ?

Ivon

Matelin, vad e hra ho komzeu d'em halon !
D'em halon, ker gwasket ged er boén ! Arnehon
E koéhant èl er gloéh⁹ àr en douar diséhet.
Hui e e asé taolein àr me halon feuket,
Un hadenn vad bennag ! Hag aveid kement sé
E kemér ho teuhorn me 'lar deoh trugéré....
Mez, Matelin, gobér muioh ne hellan ket
Bet' en dé ma kavein er mab em-eus kollet !

Matelin

Hama ! Eh an de gomz deoh, heb klah tro erbed :
Nen dé ket gwir, Ivon, penaoz en Eutru Doué
È welet ho kroédur ken divlamm èl ma oé.
E houlennas genoh un dé her rein dehoñ
Eid ma vehé bet groeit ur beleg anehoñ ?
Er péh e laran deoh nen dé ket gwir, Ivon ?

Ivon

Allaz ! go ! Matelin.

Matelin

Nen dé ket gwir eùé !
Mez me homzeu, Ivon, e hra poén deoh, marsé ?

Ivon

Nepas. Komzet ataù, Matelin, ya, komzet !

Matelin

Nen dé ket gwir eùé penaoz kaer en-deus bet
Èn Eutru Doué gobér, n'eh-eus chet rein dehoñ
Er péh é houlenné ! Nen dé ket gwir, Ivon ?
Hama en Eutru Doué en-deus eañ kemeret.

Ivon

Ya, Matelin, gwir é er péh eh-eus laret.
En trteu-zé n'em-boé ket betag hiniù choñjet.
Mez bremen er sklêrdér e splann é me spered.
Ré em-esus um garet mé-memb, é gwirioné,
Ha doh me skoein, mad en-deus groeit en Eutru Doué !

Matelin

A ! hui e gomz bremen èl ur hrechén, Ivon !

Ivon

Neaoh be' zo ér bed kement a béherion
E welam é viùein euruz hemb péoen erbed.

⁹ gloéh : gliz.

Ken euruz ma ta hoant d'er ré all de lared
Penaoz Doué ne hra ket é lod de beb-unan.

Matelin

En nemb e gomz èl-sé nen dé ket gwall grechen.
Doué e hrey d'er ré vad o govr, un dé, én neañ !
Rag Doué e oui péein, Ivon, ged larganté
Oll er ré e labour eitoñ én o buhé.
Eid er ré all,) er ré e zispriz é lézenn,
Avid o hastien eañ o hav, ha pa ve ven.

Ivon

Ya, Matelin ; neoah un dén e vourrehé
E weled mar a weh dorn kriù en Etru Doué
E skoein, memb ér bed-men, péherion aheurtet
El er ré ma komzet anehé. - Ha sellet !
Più en-deus groeit biskoah kement a fallanté
El en Etru Keriolet en é vuhé ?
Ha neoah n'en-deus chet dén erbed e ziskoa¹⁰
Boud ken euruz èltoñ àr en douar. Eañ e hra
Goap ag en Etru Doué, chetu, èl a bep tra,
Ha neoah eañ e viù hemb poén hag hemb ankin.
Più en-deus eun¹¹ enta ag en all, Matelin.
Doué pe Keriolet ?

Matelin

E komz èl-sé, Ivon,
A ! hui e lak ho piz é gouli me halon !
Un azen èl on-mé ne hell reskont nitra
A-zivoud ho komzeu ! neoah e zo un dra
E hellan lared deoh ! kalon en Etru Doué
E zo eid er péhour èl ur mor a drué !
Ne hallan ket choñjal penaoz me mestr un dé
Ar-lerh m'en-deis diskoeit kement a fallanté
Godué en devoud bet karet er wirioné
Ne hello mui doned àr en hent mad en-dro !
Ha neoah Doué e zo ker mad !....

Ivon

Chetu gwerso
Ema Keriolet, pèll braz, é rideg bro !

Matelin

Be' vo ur blé arhoah en-deus un dilézet
Eid moned de gemér relijion en Turked ;
Hqag a-houdé, Ivon, he hran 'meid pédein Doué
De hobér é-keñver me mestr é volanté !

¹⁰ ziskoa : ziskouez.

¹¹ eun : aon.

Ivon

Med e hret, Matelin !

(Kleuein e hrér, en hent, perhinderion o kanein é toned a Geranna !)

Santéz Anna, mamm a garanté
Taolet àrnamb ur sell a drué.

Ivon

A ! A ! Perhinderion
E toned a Santéz Anna, ag er pardon.

Matelin

Ema Frañswez geté ! Anaùein mad e hran
E voéh, sklêr èl hani ur vouialh, ha pe gan.

Trived pennad

Matelin, Ivon, Frañsez

Matelin

Arriüet oh, Frañsez ?

Frañsez

Ya, Matelin.

Ivon

Petra

A-neùé eh-eus hui gwélet é Keranna ?

Frañsez

Kement a dreu, Ivon, ma vo red dein gortoz
Aveid o diviz deoh merhad betag en noz.

Ivon

Ur bouchad tud e oa eno ?

Frañsez

Tud a-vandenn

Deit a bep kornad bro – séieu du, séieu gwenn
Lane oé en henteu ! Biskoah n'em-eus gwelet
En ur gêr ker bihan kement a dud tolpet !

Matelin

Intron Santéz Anna e vo kontant neuzé !
Mez n'eh-eus chet kleuet eno, Frañsez, doéré
Keriolet ? E-mésk un tolpad tud èl-sé
E hellér mar a wéh kleued komz anehoñ.

Frañsez

Nann, Matelin ; hani ag er berhinderion
N'en-deus é-pad en dé komzet dein anehoñ.
Mez, mar karet gortoz, ur peur em-eus kavet
Ar en hent hag ez a de Gerluéz de gousked.
E hello lared deoh er péh ne ouian ket.
N'ne-deus chet èl ur peur eid lared sonenneu ;
N'en-deus chet èl ur peureid gouied doéréieu !

Ivon

Hag é ta er peur-sé de gousked de Gerluéz ?
Hui en-deus eañ marsé pédet de zond, Frañsez ?

Frañsez

Nepas ! E Kéranna é voned d'er fetan,
Em-eus eañ mé gwelet aveid er wéh kentañ
E zillad diliüet ha groeit rah a dammeu.

Goleit a fank cherret merhad é mar a greu.
E ziskoé mad é oé peur èl er ré peurrañ,
Ha trué vraz e hré d'en oll er hêh krechan !
Mez ne houlené ket ged hani anehoñ,
El er glaskerion bouid arall, en alézon...
Goudé, m'her gwelas hoah ér chapel, rag e oén
En ur horn, é-taldoñ, é-paf en ovérenn.
Biskoah n'em-eus gwélet dén erbed é pédein
El er peur-sé, durant ma chomas é-tal dein.
Mar a wéh m'her hleué neoah é huanadein,
Hag é zeulagad saùet a-benn d'en neañ
Redeg e hré dareu èl deur ag ur fetan.
Lusket em-eus ohpenn ur wéh goulenn getoñ
Pé poén, pé ankin braz e vougé é galon.

Ivon

Ha n'eh-eus chet eañ groeit ?

Frañsez

Nann, n'em-eus chet kredet !

N-en-edsu chet ur hard ér em-eus eañ hoah kavet
Ar en hent, ha doned e hré ged kalz a boén
Avied arriù amenkourz er-walh eid er goén.

Matelin

Gwéll e vehé bet deoh, Frañsez, chom d'her gortoz.

Frañsez

Diskoeit em-eus en hent dehoñ, ha kent en noz
Hoah er-walh en-devo de zoned bet' er gêr.

Matelin

Eidom-ni Bretoned, ur peur e zo ur brér !
Ged léùiné perped red é hen dégémer
Ha rein dehoñ er péh e zo gwellañ én ti :
A-benn d'er peur ez a d'un gwéled, dam un-tri...

Ivon

Chetu eañ ust er-walh, Matelin, é toned.

Pevarved pennad

Matelin, Frañsez, Ivon, Keriolet
(*Keriolet, edan gwiskamant ur peur*).

Keriolet

Re vo anù ur Salvér é pep léh benniget !

Er ré all

Re voé peb amzér é anù santél mèlet !

Matelin

Mall e oé deoh arru eid dichuéh, ha koéniein !

Keriolet

Ya, chuéh on ma ne hellan ket mui um stléjein,
Ha poén vraz em-eus è toned bet' en ti.

Matelin

Ma ne hran ket poén deoh, a bé bro é tet-hui ?
Biskoah én ur hornad n'em-eus chet ho kwélet.

Keriolet

Er vr-men a-houdé gwerso nen don bet,
Hag ér bed-men buan mad é vér disanùet.

Frañsez

E Keranna hiniù – àr en hent d'er fetan
Em-eus mé ho kwelet aveid er wéh kentañ.
(*Etre e zent*).
Ha neoah me anaù er voéh-sen e gleuan !

Keriolet

M'em-eus mé ho kwélet hoah mar a wéh, Frañsez.

Frañsez

A ?

Ivon

A !

Keriolet

Kollet eh-eus enta er choñj a groéz
Er Goh-hent !

Matelin

(*eh obér sin ar groéz*)
A ! men Doué, chetu eañ !

Frañsez hag Ivon

Keriolet !

Izaak

Eañ memb.

Frañsez

(Etre zent)

Er peur ag er fetan !

Matelin

A ! Eutru, laret dein éma hui e wélan !
Hui ! ker soursiuz gwah arall àr ho tillad !
Hui é vé bet perped gwélet kampennet mad !
Hui é e zo amen dirag men deulagad !

Keriolet

Yaz, mé-memb èl er mab prodig dirag e dad !
Mez ér Heriolet e wélet dirakoh
Ne gavéet ket mui er Heriolet koh !

Matelin

Pe vehé gwir ahoel er homzeu e laret !
Pe vehé gwir éma memestr konvertiset !

Frañsez

A ! ya, pe vehé gwir kement-sé !

Keriolet

Eid perped

Reit em-eus me halon d'er Huerhiez ha de Zoué
O ! me madeu, mem buhé mem e zo dehé !

Matelin

A ! Gwerhiez venniget ! Pé ker kriù éh oh hui !
Biskoah en diaoul genoh ne hello ket hoari !
E beg memb en ihuern, a-zré é graboneu
Hui e skrap, o ! Gwerhiéz Vari en ineanneu !
Jamez ataù, Eutru, n'em-boé ket mé kredet
Penaoz er Huerhiéz vad en-doa ho tilezet !

Keriolet

Er Huerhiéz e zo deit hag en-deus kaset dein,
Ha pe oén ar fallañ, en diaoul eid me salvien !

Ivon

En diaoul !

Frañsez

A ! n'eh eus chet, Eutru, choñj ag er péh
E lareh a-zivoud en diaouled, mar a wéh ?

Hui o galvé a voéh ihuel d'um ziskoein deoh ;
Mez en diaouled spontet e ridé dirakoh !

Keriolet

Allaz ! en amzér-hont ker fall e oén èlté
Ha kredein e hran mad e véhen bet un dé
En o mesk, én ihuern.

Frañsez

A ! m'her hred mé eùé !

Keriolet

Neoah Doué en-deus bet ur wéh ohpenn trueé
Doh er péhour hemb par e oen en amzér-se ;
Red vo é anù santel é peb léh benniget !

Rah er re all

Re vo anù ar Huerhiéz é peb amzér mélet !

Matelin

Mar nen doh ket ré chuéh, Eutru, kent mond d'en ti,
Hui a hrehé, me 'gred, plijadur dem on-tri
Pe blijehé genoh lared dem é pé bro
Eh eus kavet, Eutru, n hent de zond én-dro !

Keriolet

A ! Matelin, ré hir e vehé kent en noz
Lared deoh me istoér, ha, mar karet gortoz.
Hineah ha pa veem rah tolpet é korn an tan,
En-deus hoah me zennet ag er vouillenn lousañ.
Me 'laro deoh penaoz chetu tostig tri miz
E pasein e Loudun, é-tal dor un iliz,
Me 'glevas trouz ha béh àr-drañ er magoérieu.
En diaoul e oé eno é hobér é ardeu.
Revé ataù er péh e laras dein ur voéz.
N'em-boé kleut kemend a drouz hag a savar !
Mé welas dirakon ur léanez posédet.
Hé horv e oé deit de voud ti er gwall-spered !
O ! me wél hoah hé dent skrignet, hé fas krommet,
Hé deulagad digor é splannein èl goleu...
N'em-boe ket hoah lamet me zroed ag en treuzeu
En diaoul e oé énni en-devoé men gwelet...
Chetu eañ é hudal muioh aveid jamez :
« A ! A ! Keriolet ! m'az anaù ! Kerh ér-mêz.
Perag é ous-te deit amen, péhour hemb par ?
Nen deus chet dén erbed èl ous-té àr en douar.
Perag é chomez-té amen de ma cheleu ?
Aveid kleued marhad istoér ha¹² follèheu !
Hama ! Cheleu, mem brér ! » Eañ un lakaas neuzé

¹² ha : da

De lared oll en treu kuhet a mem buhé,
 En treu louz ha méhuz àr benneu me deulin !
 Hag àr-lérh pep torfed dizoleit, eañ huché :
 « Bremen é welér mad justis en Eutru Doué !
 En êled e zo bet taolet eid birùikin
 En tan-flamm en ihuern, eid ur péhed hembkin !
 Hag un torfétour èl hanen Doué en añdur,
 Hag e chom d'her gortoz èl un tad e groédur. »
 -Eañ e laras eùé penaoz edi me zennein
 Ag er fank, e Huerhiéz e oé dit a-benn dein,
 Penazo em-boé me léh én ihuern a-werso
 E-mésk er bèherion vrasañ e zo eno,
 Kenévé madeleh er Huerhiéz venniget
 En-doé astennet dein hé dorn ha me salvet !
 Ne faoté ket muioh eid tarhein me halon,
 Ha lakaad karanté en Eutru Doué énon.
 El sant Pièr - me fatron – àr er mané Kalvar,
 Me ouelas mem buhé paset ha, ged glahar,
 Me daolas èl ma taoler en teil ag ur hreu,
 E kalon ur béleg santél me féhédeu.
 Euruz eid birùikin me 'venn bremen biùein
 E hobér vad d'en oll , gwellikañ ma hellein.
 Hui e hell hel lared tro-ha-tro – Ag hiniù
 Porh Kerluéz – ti me mamm – e vo tré ma vein biù
 Porh er ré n'en-deus chet ér bed-men ti erbed.
 Ti er ré beur, ti er ré glañv ha mahignet,
 Digoret braz en nor dirag o mizérieu !
 Déhé me nerh – men gwed – déhé rah me madeu !
 Hui e hell hel lared dehé – é péb amzér,
 E prh Kerluéz int e gavo ur brér !
 Ha marsé me hello ged me alézoueu
 Péein d'en Eutru Doué deli me féhedeu !

Matelin

Sellet ! Eutru ! gouelein e hran doh ho cheleu !
 Er marù e hell a-benn doned de me hemér,
 Ha boud ma vé red dein àr-lerh, ér Purgatoér
 Chom kant vlé hag ohpenn, Eutru, euruz e vein,
 Rag me 'zo sur penaoz un dé en ho kwelein
 E-tal ho mamm, ihuél, du-hont, é lein en neañ.
 De rein nerh er-walh dein evid achiù mem buhé !

Keriolet

Matelin, hir é hoah en hent – Er haletañ
 E zo hoah de hobér. Pédet en Eutru Doué

Ivon

Avedoh èl a-gent, ni a bédo, Eutru ;
 Mez mar a wéh eid om pédet eùé d'ho tu...
 Rag eidon-mé ataù d'obér em-eus a Zoué

Eid rein dein nerh de zoug er samm a mem buhé.

Keriolet

Perag enta, Ivon ? Perag en ho kwélan
Ken trist hiniù ? Be' zo – en ho ti – unan klañv ?

Ivon

Chetu tostig ur blé, Eutru, é ma gouli¹³.
Me merh, me moéz¹⁴, me fautr, émant ér bé o-zri !

Keriolet

Petra eh-eus laret ?

Matelin

Allaz ! Er wirioné,
`Marù é rah é gerent.

Keriolet

Me fillor Pier eùé ?

Ivon

Ya, Eutru !

Keriolet

A ! Ivon, ho kroédur e oé glan !
Gwenn-kann èl ur boked lis e oé é inean.
Fank erbed n'en-devoe ket hi hoah kousiet.
Doué – m'her gouli mad bremen – en-deus hi¹⁵ kemeret
Er momant memb ma oé deli dein-me merùel.
El-sen é-léh un diaoul eañ en-deus bet un èl.
A ! bremen me gomprenn perag er Gwall-Sepred
E laré dein penaoz un all en-doa péet
De Zoué lod a zeli mem buhé treménet !

Frañsez

Ya, aveidoh, Eutru, en deus reit e vuhé.

Ivon

Hama ! Ra bo mélet neuzé en Eutru Doué !
Mad en-deus groeit kemer me hroédur. Eidon mé
Betag me marù ged joé bremen me labouro...

Keriolet

E-tal on, é me zi, Ivon, hui e viùo
Ged Matelin ha mé – ha hui eùé, Frañsez
Ne vo ket ré a bévar eid chervij é Kerluéz.
Oll er ré beur e zey amen de glah bara

¹³ gouli : goullo.

¹⁴ moéz : maouez

¹⁵ hi : gwregel eo "inean", evel e galleg, evid an oberour.

En anù en Eutru Doué, a-berh Santéz Anna !

Ivon

Pendégwir ‘m-eus chet mui nitra de garein
Ar en douar, é-tal oh me chomo de viùein
Aveid chervij, èl oh, Doué hag er beurizion.

Keriolet

Ha hui, Frañsez ?

Frañsez

Eutru, mé hreymé èl Ivon !
Rag n’en-deus chet, me gred, àr en douar, tra erbed
E dalv kement èl d’en oll, hemb goulenn gobr erbed !

Matelin

Hama ! Paotred, mar dé ér mod-sen é komzet,
Mar dé gobér amen ur hovand e glasket.
Eh an-mé de houlenn ged Doué chom hemb kas hoah
Er Marù – er falheréz vraz – de zoned d’em hlah,
Kent en dé ma vein deit de voud ur gwir menah !
Mez, Eutru, mall e vo dem arsaù un diviz,
Rag àr ho korv er boén ag en deùeh e boulz.

Keriolet

Ya, dam a-benn d’en ti de hortoz oll er ré
E zey de glah o bouid a-berh en Eutru Doué !

Matelin

Dam, Eutru, kent ma vo du-hont kuhet en heol.

Pemved pennad

Keriolet, Matelin, Frañsez, Ivon, Izaak

Izaak

Eutru, chetu unan e 'z a a-berh en diaoul,
A-berh er Roué eh-eus gwéharall chervijet,
Eid dégas deoh er choñj ag ho puhé paset.

Keriolet

Izaak !

Izaak

Ya, mé-memb.

Frañsez

Er sorsér melliget.

Ivon

(Etre e zent)

Men Doué ! Berùein e hra men gwed é men gwahiad.
Chetu muntrér me mab dirag men deulagad !

Izaak

Eutru Keriolet, n'eh-eus chet me hleuet !

Keriolet

Mar dé a-berh en diaoul, Izaak, é komzet,
N'eh-eus chet 'meid moned ged ho hent, hag a-benn.

Izaak

A ! A ! chetu, me mestr, er reskont e horten.
Ha p'em-eus labouret pèll er-walh aveidoh,
Bremen ha p'en don chueh, bremen ha p'en don koh,
Hui e lar dein moned de glah mem bouid pèlloh.
A ! ne horten ket gwél ur lorbouir èl hoh,
Ya, er lorbouir brasañ en-deus douget en douar.

Keriolet

(Etre e zent)

Men Doué, groeit ma hallein her cheleu, hemb kounnar !

Izaak

Ha me 'zo deit neoah, hemb krénein, d'ho kavouid
Nepas aveid goulenn genoh argant pé bouid –
Ha nitra ér bed-men n'em-eus chet mui d'obér –
Mez aveid lared eoh kenevo, rag en ér
E dosta ma vo red dein moned de wéled
Er mestr em-eus é-pad mem buhé chervijet.

Keriolet

Izaak....

Izaak

Laosket mé de gomz, mar plij genoh,
Ha de lared er péh em-eus de lared deoh.
Un noz, é lann er Mont, en diaoul um zikoas dein ;
A-houdé d'em sekour : « Izaak, emé eañ,
Chetu gwerso 'h-eus gwerhet dein hos inean.
En hichenn, reit em-eus deoh ur gelloud hemb par,
Er gelloud de hobér treu souéhuz àr en douar,
Er gelloud de uhellaad en dud hag e loened,
Kentéh mann dé goéhed àr neuzé er hlinùed
Ged lezeu e cherrér, de greiznoz, ér lenneu
Ha pe' 'n dé rah en dud kousket àr er mêzeu.
N'en-deus chet lezeuér erbed ken kriù èl oh
Mez n'en-deus chet eùé ur profed abilloh.
Ran hui e len reih mad én amzér de zoned.
E linenneu en dorn ha de noz, ér stired.
Hama ! eid kement-sé un dre helounnan
Genoh, un dra hembkin ! – Gouniet dein inean
Er minour a Gerluéz – hag é-pad ho puhé
En diaouled, Izaak, e hrey ho volanté.
-A ! labouret em-eus, hemb arsaù a-houdé
Aveid gounid d'en diaoul inéan Keriolet...
Allaz ! Lénet em-eus en nihour ér stired,
Penazo ne dalvé ket er boén moned pelloh
A-dal hiniù plégein e zo red dirakoh.
Rag er Huerhiéz hi-memb e zo a-du genoh
Eidon-mé goulennet em-eus ged en diaouled
Doned d'em hlah amen é ti Keriolet.

Keriolet

Izaak, goulennet kentoh pardon ged Doué !

Izaak

N'en-deus chet na trué, na pardon eidon-mé !
Me ienan a-werso d'en diaoul e zo gwerhet.
Ha torrein er marhad hiniù ne hellan ket.
Deus enta, Satan, o ! me mestr, o ! me Doué,
Deus hiniù de rein dein er gobr a mem buhé !
Digoret braz en nor ag en ihuern, diaouled,
En nor eh-eus cherret dirag Keriolet !

(Eeun e red d'um lahein).

Hwerved pennad

Keruiolet, Matelin, Frañsez, Ivon

Keriolet

Men Doué, pé ker spontuz é marù er ré dannet !
Trugéré deoh enta, o ! Gwerhiéz venniget !
El ur vamm he hroédur, hui eh-eus men gwarnet,
A-greiz er fallenté, a-greiz er lousteri,
Hui é en-deus me renet, o ! Gwerhiéz Vari !
Re vo é peb amzér mélet hoh anù santel !
E pep léh ag en douar, re vo laret ihuél :
Er vqadeleh eh-eus bet eid Keriolet,
Eid er pehour brasañ en-deus biùet ér bed :
O ! Gwerhiéz truéhuz, achiùet ho labour
Ha groet ma vo ket mad èl mamm dé bet pehour !

Rag er ré all

Ya, groet ma vo ker mad èl mamm dé bet péhour !

Matelin

Biskoah nen don ket bet ken euruz àr en douar,
Hag a men deulagad rideg e har en dar.

Keriolet

Dam da Vizérikord da lared trugéré
D'en hani e anùer er Vamm a drué.

Matelin

Dam de houlenn geti ma béet bélèg un dé !

*(Achiùet é en hoari
Pleuigner, en eilved dé a viz est 1902)*